




KROAZ BREIZ

NIVERENN
KENSTRIVADEGOU
BLEUN-BRUG 1950

E TI TREANTON

e kaver peb tra

Harnachou, Kinkailherez, Glaou,
Koat "an Nord"
Houarn

Ha kement tra ho peus ezomm
en ti
war-dro an ti
hag en liegez

TI TREANTON
E LANDIVISIAU

War Blasenn an iliz ha plasenn Lourdes

Telefon 7

E KASTELL-PAOL

war ar Blasenn Vras

Telefon 130

133642

KROAZ-BREIZ

MEURZ-EBREL NIV. 23-24

PRIZIOU : { Koumanant ordinal (eur bloaz) 350 lur
Koumanant a zikour 500 lur
Koumanant a enor 800 lur

1. Evit kement a zell ouz danvez-skrid ar gelaouenn : skriva da rener Kroaz Breiz : Mr l'abbé Jean-François Falc'hun, professeur au Grand Séminaire de Quimper (Finistère).

2. Evit kement a zell ouz Koumanantou ha profou, skriva da : Mr l'abbé Laurent Bleunven, recteur, Plomelin, par Quimper, (Finistère). C. C. P. 1266.53 Rennes.

TAOLENN

War-du Bleun-Brug Kastell I	Pajenn 2
Roll Bleun-Brug 1950	3
Evit ar vugale : kenstrivadegou.	
I. — al lenn	4
II. — an displegerez	11
III. — ar c'hanaouennou	16
IV. — an treserezh	18
Evit al laziou-kana : kenstrivadeg	
V. — ar c'han	18
Evit an holl : kenstrivadeg	
VI. — ar c'hanaouennou poblek	20
Evit ar yaouankizou : kenstrivadeg	
VII. — ar gaera rimadell	20
Kenstrivadeg an displegerez	20
Kantikou da veza kanet e gouel ar Bleun-Brug	21-22


Ha sonjet ho peus paea ho koumanant ?
M'ho peus graet, gwella-ze ha bennoz DOUE !
Ma n'ho peus ket, grit hep dale !
Espenn a reoc'h d'eomp amzer ha dispign.

REVUE MENSUELLE

Ar merour : M. l'abbé BLEUNVEN
Recteur, PLOMELIN, par Quimper

Ti-Moulererz Kreiz Breiz
36, Rue Richard-Lenoir, RENNES

War-du Bleun-Brug Kastell



A-dreuz Breiz abez, ameur krog a zevri da aosa gouelioù bras Kastell da viz east.

«Kroaz-Breiz», kelaouenn ar Bleun-Brug, a fell dezi er miz-mañ rei eun harp founnus da zevl al labour: an niverenn, penn-da-benn, a re danvez al labourou a dle beza kroget enno a-bell araok an hañv.

Pennadoù da veza lennet, displeget, kanet gant ar vugale hag ar strol-ladoù kanerien, kement-se a vo kavet amañ: eun dudi a vezint, a gre-domp, evit an dud vras, hag eun dalvoudegez evit ar re holl o devezo c'hoant da zibrada eur maout bennak da viz east!

PETRA DA OBER EUS AN NIVERENN-MAN?

M'ho peus soñj da gemer perz er gouel, dalc'hit mat an niverenn-mañ, evit he c'haout da vont da Gastell: deskit hoc'h-unan ar skridoù, ar c'hantikou, da gemer perz en ofisoù, ha da heulia ar c'henstrivadegoù: plijadur ho pezo!

Sikourit HO PUGALE, pe bugale hoc'h amezeien pe ho parrez, da zeski lenn, displega pe gana, hervez o oad hag o galloud, ma c'hellint kemer perz er c'henstrivadegoù. Ma kemerit ar boan-ze, e reot da genta kals vad d'ar brezoneg, hag ivez d'ar vugale ha ne zalc'hit ket da gemer plijadur gant yez o bro.

Diskouezit d'an DUD YAOUANK en dro deoc'h an tachennou a zo digor evito: rimadelloù, kanaouennou, diwezatoc'h prezegerezh...

Kit da welet ar SKOLIOU, ar vistri, da zisplega dezo petra a c'hellont d'ober gant o bugale er mizioù da zont, war dro ar c'henstrivadegoù.

Grit ar memes tra evit al LAZIOU-KANA...

Hag hoc'h-unan, perak ne gemerfec'h ket ho tro war an dachenn? N'eus fors plou oc'h, ha pe oad ho peus, marteze ec'h anavezit marvailhou fentus pe ganaouennou hag a vefe plijadur ouz o c'hlevet e Kastell...

Ma ne c'hellit ket mont d'ar gouel, an niverenn-mañ da vihana a roio deoc'h eun tamm anaoudegez eus ar pezh a vo graet ennañ, hag ive eus buhez ar Zent a zo bet hag a jom tadou hor bro hag he feiz.

Pep hini d'al labour eta, hag e vo kaer an traoù!

Roll 32^{et} gouel ar Bleun-Brug

Kastell-Paol, 4, 5, 6 ha 7 a viz East 1950

D'ar gwener 4 a viz east :

- 12 e. : Digor ar Bleun-Brug.
- 14 e. 30 da 18 e. : Displegadennou war : kelennadurezh ar brezoneg e skolioù ar c'henta hag an eil dereiz; — oberou ar Bleun-Brug war e holl dachennou; — war eun danvez eus lennegezh Breiz.
- 18 e. 30 : Digor Diskouezadeg ar Bleun-Brug.
- 21 e. : C'hoariva brezonek e sal Santez-Tereza.

D'ar zadern 5 :

- 9 e. 30 da 12 e. : Displegadennou ha prezegennou war ar Zent breizek ha keltiek (Roet e vezint gant ar aotrou c'haloni Batany, Person, Sant Vaze-Gemper; An Tad Paol-a Leon, eus Urz Sant-Fransez; Joz an Doare, eus Kastellin; an ao. Dujardin, eus Lokornan, ha prezegerien eus Breiz-Veur).
- 14 e. da 18 e. : Displegadennou, gant skeudennou, war Sent Breiz.
- 20 e. : Degemer Relegou ar Zent.
- 21 e. 30 : « Nozvezioù Breiz », c'hoariva dirak iliz-veur Kastell.
- 22 e. 30 : Prosession ar goulou etrezek Park an Aod.
- 24 e. : Ofereñnou hanter-nôz : nao ofereñn a vezo lavaret asamblez ouz nao aoter.

D'ar zut 6 :

- 8 e. 30 : Kenstrivadegoù ar Bleun-Brug.
- 11 e. : Ofereñn-bred eskobel.
- 15 e. : « Koroll ha kan » war leurenn Park ar Gernevez.
- 18 e. : Prosession ar Zent ha Bennoz ar Zakramant, en iliz-veur. Ar parrezioù o deus evel paeron eur Zant Breizat pe Geltiek a zo pedet da zont da Gastell d'ar zut 6 a viz east, gant skeudennou ha bannieloù ar Zent paeroned... Ar re o dougo a lako o c'haera gwisksamantoù breizat.
- 21 e. : Breiz hag ar finvskeudennerezh (Cinéma), e Sal Santez Tereza.

D'al lun 7 :

Beaj dre Vro-Leon (gant otoioù).

Baleadenn Relegou ar Zent

Relegou ar Zent o deus savet an Eskobtioù breizat a vo degaset eus o c'hêrioù e prosession dre an hent-bras, nemet re Sant Malo a deuio dre vor betek Rosko.

Degemeret e vezint e teid an hent gant ar parrezioù. D'ar zadern 5 a viz east, e rint ar pennad hent diweza evit beza degemeret gant enor e Kastell diouz an noz.

Ar re o deus bolontez da heulia ar relegou epad eun hanter-devez, pe eun devez pe ar veaj abez, a dle sonjal a-vreman d'ar c'hel o amzer vak d'ar mare-ze... Dizale e vo kavet war ar c'hazetennou an henchou a vo kemeret gant ar Relegou; beleien ar parrezioù a roio an holl guzilioù diwarbenn kement-se, hag ive Sekretour ar Bleun-Brug, Tréboul (Finistère).

I. — KENSTRIVADEG AL LENN (CONCOURS DE LECTURE)

Evit bugale ar skollou

Ar vugale o devezo da lenn eur pennad pe bennad eus buhez ar Seiz Sant a zo aman warlerc'h.

Evit an holl genstrivadegou, kas anioù ar vugale hag o chomlec'hioù (adresses) da : M. Vincent Séité, école St-Jean, Tréboul (Finistère), abenn fin miz gouere da ziwedra.

SANT PAOL AORELIAN

Sant Paol Aorelian eo patron Bro-Leon. Ganet eo bet en Enez-Vreiz. Kaset e voe da skol Sant Iltud, mestr bras kals eus hor Sent koz. Tostik-tre ouz ar mor edo ar skol. Nebeut ha nebeut e c'houneze an dour war an douar. Eun deiz m'en doa ar mor en em dennet pell, e verkas Sant Iltud, gant e vaz, eul linenn war an traez gieb. Goude e savas ar baotred-skol eun doare mogerig-douar war al linenn-ze. Echu ganto, e c'houlennjont digant Doue ne dafe mui ar mor pelloc'h. Selauet e voe o fedenn.

En douar nevez e voe hadet gwiniz. Met ret e oa diwall an eost ouz al laboused. Tro Baol a zeuas. Kousket a reas ar bugel goude eur pennad gward. Dont a reas al laboused, hag i ha debri kals-kals a c'hreun. Paol a spontas pa zihunas. Epad daou zevez ne gredas ket mont da gaout e vestr. D'an trede devez e welas adarre al laboused o laerez. Neuze e pedas an Aotrou Doue da lakaat al laeron da zont gantañ betek Sant Iltud. Dont a reas al laboused d'e heul. Ar mestr a reas sin ar groaz warno. Ha kuit al loened-nij. Ne zeujont mui da zebri gwiniz ar manati.

Echu gantañ e studi, ez eas Paol da vanac'h. Ne voe beleget nemet d'e dregont vloaz. Ar roue Marc'h a fellas dezañ ober anezañ eskob e vro. Nac'h a reas ha kuitaat Enez-Vreiz gant beleien all.

Dilestra 'reas da genta en Enez-Eusa. Goude sevel eur manati, e tis-kennas war an douar bras. Sevel a reas manatioù e Gwitalmeze hag e



Plouarzel. Warlerc'h, ez eas da gaout chom en Enez-Vaz. Eur zarpant a oa eno, hag a zebre an dud hag al loened. Gant sikour Doue ha Gourmestr ar vro, ar c'hont Wizur, o nadech, an den kalonek, e teuas ar Zant abenn da deurel al loen spontus er mor.

Eun deiz e teuas eur pesketaer da ginnig da Wizur eur c'hloc'h kavet er mor. « O, eme, Baol, unan eus kleier ar roue Marc'h ! P' edon o vont da guitaat va bro, e c'houlennis unan eus e gleier digant Marc'h. Ne fellas ket dezañ e rei din. Met Doue en deus degaset ar c'hloc'h-se betek amañ. »

C'hoant Wizur a oa kaout eun eskob evit e vro. Ha dont a reas abenn da lakaat Paol da zegemer ar garg. Pell amzer e renas Paol eskobti Kastell. Mervel a reas koz, e manati Enez-Vaz.

D'an 12 a viz meur, e vez graet gouel Sant Paol Aorelian.

K. Rieu.



SANT KAOURINTIN

Sant Kaourintin eo patron Bro-Gerne. Ganet eo bet e kichen Kemper, bremañ 1500 vloaz. Da veleg ez eas. Goude, en em dennas en eur c'hoad, tost d'ar Menez-C'homm. Aze e pede hag e rae pinijenn. An Aotrou Doue a bourchasas boued dezañ en eur lakaat eur pesk da zont da veva en e feunteun. Bep mintin e troc'he Kaourintin eun tamm eus ar pesk. Met dioustu goude e oa adarre al loenig en e bez.

Dounoc'h er c'hoad bras e veve eur beleg koz, e ano Primel. Mont a reas Kaourintin d'e gaout. An daou zen santel a bedas hag a gaozeas diarbenn o ene epad an devez hag epad an novez. D'ar mintin, pa ganas al laboused, e c'houlennas Kaourintin lavarout an oferenn e ehapelig Primel. Mont a reas an

den koz da gerc'hat dour evit ar zakrifis santel. Pell edo ar feunteun; kamm e oa Primel; skuiz-bras e oa pa zeuas en dro. Truez en doe Kaourintin ouz e vignon. Epad an oferenn e c'houlennas digant Mestr pep tra rei dour da Brimel en eul lec'h tostoc'h ouz al lochennig. Selauet e voe e bedenn : er plas ma sankas e vaz goude an oferenn e tarzaz eur feunteun dour sklaer. « Bennoz deoc'h, Aotrou Doue », a lavaras an daou zant.

Eun deiz edo ar roue Grallon o chaseal e koad Neved. Euruz e voe o kaout tilg Kaourintin evit mont da ziskuiza. « Ha ne c'hellfec'h ket rei din eun tamm boued bennak ? » a c'houlennas Grallon. « Gortozit eur pennadig ! » Ha Kaourintin ha mont da droc'ha eun tamm eus e besk. Goude ez eas da gaout keginer ar roue hag e lavaras dezañ aoza merenn, gant an tamm pesk-se, evit ar roue hag e zervijerien. Goap a reas an den anezañ. Met peogwir n'en doa netra all e rankas ober gant ar pesk a ginnige Kaourintin. Hag awalc'h e voe evit an holl.

Unan bennak a yeas neuze, dre guz, da droc'ha eun tamm eus ar pesk burzudus. Met gloazet e chomas al loenig betek ma teuas Kaourintin da rei dezañ e vennoz. Warlerc'h, e lavaras dezañ mont kuit eus ar feunteun.

Evit trugarekaat ar Zant, e roas Grallon dezañ an ti en doa e Plou-diern hag an douarou tro-dro. Kaourintin a c'hellias evelse sevel eur manati hag eur skol.

Nebeut goude, war ali Sant Gwennole, e oa anvet Kaourintin da eskob Kemper. Epad meur a vloavezh e renas an eskobti, o prezeg dreist-holl dre e skouer vat.

D'an 12 a viz kerzu e vez graet gouel Sant Kaourintin.

K. R.



SANT TUAL

Sant Tual, pe Tugdual, pe Pabu, eo patron Bro-Dreger. Ganet eo bet en Enez-Vreiz. Mont a reas da vanaç'h, o tilezel pinvidigeziou ar bed. Anvet e voe da abad, hag heñ yaouank c'hoaz.

Eun nozvez en em ziskouezas dezañ eun Ael hag a lavaras dezañ: « A berz Doue, kuita da vro, ha kae dioustu da Vreiz Vihan. Daouzek manac'h ha tri-ugent a fellas dezo mont d'e heul. Diskenn a rejont betek an aod tosta ha kaout eno eul lestr prest da zével an eor. Mestr ar vag a zaludas Tual: « Doue r'ho miro, c'houl hag hoc'h holl vignoned. Pignit em bag. Edomp ouz ho kortoz. » A-du e oa an avel. D'an deiz warlerc'h e oant degouezet e Bro-Leon, e parrez Plonger. Steuzia 'reas neuze ar vag, martoloded hag all. Ar venec'h a lavaras bennoz da Zoue evit eur veaj graet ken brao. Daou vanati a voe savet, e lec'h m'emañ hirio Trebabu ha Sant-Pabu.

Goude, e treuzas Tual Bro-Leon e lec'h ma labour e Sant Paol hag e ziskibien. Mont a reas d'ober war dro ar Vretoned divroet, o chom e Bro-Dreger. Diazeza 'reas o farrezioù ha sevel eur manati e Landreger.

Ar bobl a c'houlennas Tual da eskob. Pa glevas ano eus kement-se, e tec'has prim betek Añjer. Eskob Añjer a yeas da Baris, ha Tual d'e heul. Pa 'z eas Tual dirak ar roue, e tiskennas eur goulmig wenn war e skoaz dehou.

Tud eus Bro-Dreger en em gave eno ivez. Goulenn a rejont adarre Tual evit eskob. Hag ar wech-mañ e voe ret dezañ plega. Ar roue a roas dezañ profou kaer: eur c'halir hag eur gurunenn aour.

Daoust d'e garg uhel, e kendalc'has Tual da vev er baourentez evel ma rae pa ne oa nemet manac'h.



Abenn eun tamm amzer ez eas skuiz lod eus pennou ar bobl gant an Tad o doa ken c'hoantaet. Ken e voe ret da Dual mont kuit. Betek Rom ez eas.

Met gwalleurioù a gouezas war Dregeriz, goude m'o doa lakaet an eskob santel da dec'hout. Neuze e rejont pinijenn ha prosesionou evit goulenn pardon. Pedi a rejont ar Zant da blijout gantañ dont en dro en o zouez, ha da rei dezo e vennoz.

Distrei a reas Tual. Warlerc'h, e c'hellas, betek e varo, gouarn e peoc'h eskobti Landreger.

D'ar c'henta a viz kerzu e vez graet gouel Sant Tual.

K. R.



SANT BRIEG

Sant Brieg eo patron bro Sant-Brieg. Ganet eo bet e Kembre. Pinvidik e oa e dud. Pagan e oant, met madelezus d'ar beorien. Kaset e voe Brieg da Baris, da skol Sant German. Dindan eun devez e teskas an abeke. Madelezus e oa evel e gerent. Eur wech e roas d'eur paour ar pod-pri a oa gantañ evit mont da ger-c'hat dour. Gourdrouzet e voe avat gant eur manac'h. Neuze, en eur leñva, ez eas d'an iliz da bedi. Pa zavas, e kavas en e gichen eur pod-steañ kaer meurbet.

Deut dezañ an oad, e voe beleget. Nebeut goude e tistroas d'e vro. Eur marc'h a voe roet dezañ evit mont betek ar porz-mor. Profa 'reas e varc'h da beorien kavet gantañ war e hent.

Degouezet e Bro-Gembre, en devoe an eurvad da vadezi e dad, e

vamm, ha tud all ouspenn. Sevel a reas ilizou ha manatioù en Enez-Vreiz. Met evel Paol Aorelian ha Tual, e tilezas e vro evit dont da Vreiz Vihan. Eiz-ugent Kembreall a zeuas d'e heul.

Erruet e genou ar ster-Gouet, e tilezjont o lestr ha klask eul lec'h er c'hoad evit sevel o manati. Met kas a reas Riwall, mestr an douarouze, eun den da gemenn dezo dont d'e gaout, rak klav e oa kouezet.

Pa zegouezas ar Zant: « O, eme Riwall, va c'henderv Brieg! Doue eo hag ho kas evit va farea. » Benniga 'reas Brieg eur banne dour. Dioustu goude eva an dour-ze e voe pareet an aotrou. Evit trugarekaat Brieg, e roas Riwall dezañ e vaner hag ar c'hoad tro-dro. Difraostet e voe ar c'hoad ha savet eun iliz. Ouspenn, e tiazezas ar venec'h parrezioù ar c'horn-bro.

Daoust dezañ beza koz, e kendalc'h Brieg da welout an ilizou. Douget e veze war eur c'harr ha menec'h a yae d'e heul. Eur wech, p'edont o tremen dre eur c'hoad, e teuas bleizi dezo. Spontet, e redas kuit ar venec'h. Epad an noz e chomas sioul al loened en dro d'ar c'harr a zouge Brieg. D'ar mintin e teuas eno eun aotrou pagan, Konan, gant e zoudarded. O welout ar Zant e lavaras: « Tad, n'hor bezo Doue ebet nemet hoc'h hini. Roit deomp ar vadeziant! » Neuze e tec'has ar bleizi. Eizteiz warlerc'h e voe badezet Konan hag e dud.

D'e zek vloaz ha pevar-ugent ez eas c'hoaz Brieg da rei e zakramantou diweza d'e vignon Riwall. Nebeut goude e lavaras pedi kals evitañ. C'houec'h devez c'hoaz hag e varvas.

D'ar c'henta a viz mae e vez graet gouel Sant Brieg.

K. R.



SANT MALO

Sant Malo eo patron ar vro o tougen e ano. E Bro-Gembre eo bet ganet. Mont a reas da skol Sant Brendan, eur zant iwerzonat, brudet e veajou hir war vor. Goude beza bet beleget, e kuitaas Enez-Vreiz gant tregont kenvroad, ha dont da zouara en Arvorig, damdost da c'hennou ar ster-Rañs. Degemeret e voent en eur manati. Epad tri bloaz e chomas Malo eno. Bep a vare ez ae da welout Sant Aaron a veve en eun enezennig, e kichen.

Goude, en em lakaas da brezeg an Aviel el lec'hioù chomet pagan. Mont a reas evelse da Gersaout, da gefiver ar gouelioù Pask. Epad m'edo o pedi, e teuas unan bennak da c'houlenn digantañ lakaat da zont beo eun den yaouank a zouged d'ar vered. « N'eo ket me, a respontas ar Zant, met Doue, va mestr, hag a c'hell lakaat ar vuhez da zistrei en den-ze. Degasit ar c'horf en iliz. » Ne jomas el lec'h santel nemet Malo hag ar veleien. Pedi a rejont. Pa voe echu ar bedenn e savas an den eus an arched.

Goude, e fellas da Valo lavarout an oferenn. Met ne oa eno na kalir na gwin. War bedenn ar Zant e teuas eur maen da veza kalir hag e troas an dour e gwin.

Savet en doa Malo manati Lan-Alet. Tro-dro dezañ e labourer ar venec'h. Eun deiz ma oa tomm, e tennas Malo e vantell ha lakaat anezi a-ispilh ouz eur wezenn-dero. Eur vamm-laouenanig a zozvas er c'hougoul. Echu gantañ e labour, e welas Malo ar vi. « O Doue holl-c'halloudek, emezañ, c'houi eo hag hoc'h eus lakaat al labousig da zont em mantell. » Hag e lezas e vantell ouz ar wezenn betek ma nijas kuit an torrad laouenaniged.

Abenn 40 vloaz e rankas degemer ar garg a eskob. Ret e voe dezañ kastiza tud hag a rae pec'hejou bras a-wel d'an holl. Droug ez eas enno



Langleiz

hag e lavaras unan anezo: « Ma vefe Malo amañ, e lazfen-me. »

Mont a reas ar Zant da glask repu en eskobti « Saintes ». Met war-lerc'h ne gouezas mui berad glao ebet war vro Lan-Alet. Goulenn a reas ar bec'herien pardon digant Malo. Hag eur vouez eus an neñv a lavaras dezañ: « Distro da Lan-Alet. Met goude, deus amañ adarre. Rak amañ eo e varvi. »

Betek an Naoned ez eas gant eul lestr. Eur ar gér-ze e kerzas war droad war du Lan-Alet. Dre ma 'z ay war-raok e kouezo ar glao. Deredek a reas an dud da welout ar Zant evit e drugarekaat. E vennoz a roas dezo ha distrei da « Saintes » e-lec'h ma varvas.

D'ar bemzek a viz du e vez graet gouel Sant Malo.

K. R.



Langleiz

SANT SAMZUN

Sant Samzun eo patron Bro-Zol hag unan eus ar brudeta etouez ar Zent keltiek.

Ganet eo bet e kreisteiz Kembre. E dad a oa unan eus pennou bras e vro. Wardro e bemp bloaz e voe kaset Samzun da skol Sant Iltud. « O, eme an Abad santel, hemañ a vo doktor lies bro, enor ar Vretoned ha gloar an Iliz! » Buan-buan e teuas da veza desket bras.

Labourat a rae ivez er parkeler gant ar venec'h all. Flemmet e voe unan anezo gant eun naer. Samzun a lakaas eoul war ar gouli hag a reas sin ar groaz warnañ gant dour benniget. War an taol e voe pareet ar manac'h.

Ne oa ket karet gant an holl. Avius e oa lod outañ. Unan zoken a ginnigo dezañ eun evaj ampoezet. Eva reas Samzun ha lavarout:

« Mat-tre ho louzou! Ra vlot pareet gant Doue diouz an droug a dag ho kalon. » Hennez a voe goude mignon bras da Zamzun.

Pa voe beleget e kuitaas manati Sant Iltud ha mont d'eur manati all bihanoc'h. Anvet e voe da abad. Met kavet e voe re striz gant ar venec'h. Da Iwerzon ez eas neuze epad eun nebeut bloaveziou. Pa zistroas da Gembre, en em dennas en eul lec'h gouez, o veva e unan gant Doue.

Kavet e voe eno koulskoude ha graet eskob. Neuze reas e zoñj dont da Vreiz-Vihan en eur dremen dre Gerne-Veur. Kals a dud a oa gantañ pa zilestras e Bro-Zol. Eno e pareas maouez ha merc'h an den en doa degemeret anezañ. An den-ze a brofas-dezañ douar hervez e c'hcant. Hag e savas Samzun e vanati kenta en Arvorig.

Prezeg a reas lezenn Doue en Domnonea abez. Mestr ar vro-ze, Konomor, en doa kemeret plas ar roue gwirion, Judual. Hemañ, yaouank c'hoaz, en doa ranket tē-c'hout da Baris. Reuz a oa abaoe en Domnonea.

Mont a reas Samzun da welout roue ar Franked evit goulenn digantañ lezel Judual da zont d'e vro evit diskar Konomor. Daou vloavez e rankas eskob Dol chom da c'hortoz. Epad an amzer-ze e savas manati Pentel, e kichen genou ar Saena (Seine).

Erfin e c'hellas mont gant Judual betek enezennoù mor-Breiz. Pa voe prest pep tra e touaras gant ar roue yaouank, e Bro-Zol. Brezel a reas Judual da Gonomor. Hemañ a voe lazet en eun emgann e Plouneour-Menez. Goude e c'hellas Judual ren e peoc'h, kuzuliet gant an eskob bras. Mervel a reas Samzun goude lakaat Magloar e penn e vanati hag e eskobti.

D'an 28 a viz gouere e vez graet gouel Sant Samzun.

K. R.

SANT PADARN

Sant Padarn eo patron Bro-Wened. Ganet eo bet er vro-ze. E dad a oa eun Arvorigad. E vamm, Gwenn, a zeblant beza eur Vreizadez.

Da vanac'h en Iwerzon ez eas tad Padarn. E vamm a yeas da leanez. C'hoant Padarn a voe ober evel e gerent vat. Mont a reas da welout e dad, en eur dremen dre Vro-Gembre. Eur manati a zavas eno. Eun den eus ar vro-ze, e ano Maelgorn, a c'houlennas digant Padarn diwall eun teñzor. Daou zen a zegasas d'ar manati diou baner, enno an teñzor, hervezo.

Nebeut goude e teujont en dro da c'houlenn ar pezh o doa fiziet. Dizolet e voe ar panerou. Ne oa enno nemet mein bihan. Tamallet e voe Padarn da veza laeret Maelgorn. Ret e voe mont da gaout ar barner. Evit proui ne oa ket eul laer anezañ, e c'houlennas Padarn lakaat e zaouarn en dour bero. Ne zantas droug ebet. Ar re o doa degaset ar panerou a rankas ober evel Padarn. Devet spontus e voe o daouarn. Ha mervel a rejont. Dali e teuas Maelgorn da veza. Goulenn a reas pardont digant Padarn hag a bareas anezañ.

Distrei a reas Padarn da Vreiz-Vihan ha sevel eur manati e kichen Gwened. Edo neuze ar Vretoned o tiskenn e Bro-Wened. Trouz ha reuz a zave etrezo ha tud all ar vro. « Ro deomp Padarn da eskob, a lavaras ar re-mañ da roue ar Vretoned, hag e sentimp ouzit. » En em voda reas eskibien e Gwened ha graet e voe Padarn eskob.

Ne blijas ket atao da Wenediz, ha da Vro-C'hall e renkas tec'hout. Eno e varvas. Adalek neuze ne gouezas mui glao e Bro-Wened. « Greomp pinijenn, a lavaras Gwenediz, goulennomp pardon digant hon eskob santel ha degasomp e relegou a-mañ ! »



Langlet

Mont a rejont da glask korf Padarn. Digoret e voe ar bez. Met kaer o doe ober, ne deujont ket abenn da zibrada ar c'horf. O welout ar burzud-se e lavaras unan anezo: « Goulennet en doa Padarn diganen eur park evit sevel eun iliz ennañ. Nac'het am boa. Hirio dirak e relegou, e touan e roin ar park hag e paein sevel an iliz, ma plij gantañ dont ganeomp en hor c'hêr hag en e gêr. » Dioustu e voe gellet sevel ar c'horf santel. Gant enor e voe degemeret e Gwened. Ha glao a reas adarre.

D'ar c'houezek a viz ebrel e vez graet gouel Sant Padarn.

K. R.



II. — KENSTRIVADEG AN DISPLEGEREZ (CONCOURS DE RÉCITATION)



Kerent ha mistri-skol, lakit ho pugale da zeski unan pe unan eus ar barzonegou a zo amañ warlerc'h, ha grit dezo mont d'o displega d'ar Bleudi-Brug.

Pep barzoneg a vo displeget en eun doare beo (récitation mimée).

Kas anioù ar vugale araok fin miz gouere da. V. Séité, école Saint-Jean, Tréboul (Finistère).

A. — Paotred ha merc'hed bihan 6, 7 hag 8 vloaz.

LAOUENANIG SANT MALO

Klevit eun istor vrag

eus buhez Sant Malo :

Eun deiz edo ar Zant bras

o labourat er c'hoad glas :

ha ken start e skoe

ken e oa skuiz, ken e c'houeze...

Setu an den santel

a dennas e vantell

hag a lakeas anezi

'tousez an deliou a zistribilh.

Kerkent eul labousig

a reas eul lamm enni.

« O, emezañ, en e fistilh,

pegen brao plasig

evidoun d'ober va neizig ! »

Hag e tozvas enni

eur vi, daou vi...

Pa deuas an den santel

da glask e vantell

etouez an deliou glas,

e voe souezet bras :

« O ! eme ar Zant,

pec'hed e ve ha pec'hed bras

direnka eul labousig ken koant !... »

Hag e lezas e vantell rouz

gant al labousig dous,

betek ma tinodas eus ar viou

eun torrad koant a evnedigou.

Laouenanig Breiz.



B. — Paotred 9, 10 hag 11 vloaz.

LABOUSED SANT PAOL

P'edo Paolig Aorelian,
gant eun toullad paotred vihan,
e skol Sant Iltud e Breiz-Veur,
e voe karget e park al leur,
da vare 'n eost da zichoual al laboused.
Siouaz! chom a reas da gousket,
setu ma teuas leun
a laboused, diwar ar mor, da laerez greun.
Hor Paolig kêz a oa nec'het...,
daoust ma n'oa ket bras e bec'hed.
Met dizale 'wel eus a lark
laboused all plavet er park:
deomp d'an daoulin! eme Baolig
d'e vignoned. Ha p'o deus grêt eur bedennig,
e kelc'hont ar park... O burzud!
paket kant labous gwenn da gas da zant Iltud.
Iltud o bennigas: « Laeron gwenn, kit war nij,
eme 'r zant, met lezit va greun ganen, mar plij! »
Ha laboused Sant Paol ne deujont mui
da laerez greun en dro d'an ti.

Paotr Treoure.



C. — Merc'hed 9, 10 hag 11 vloaz.

BLEIZI SANT BRIEG

Brieg, an Eskob koz,
a deuas da zerr-noz
d'ar gêr eus e goajou.
Dek manac'h en e raok a vousekane psalmou.
Douget oa 'n eur c'harr treinet gant ejenned,
Ha petra 'rae?
Benniga 'r vro dre ma 'z ae.
Met a greiz holl 'voe diarbennet
gant eun toullad bleizi, dilammet war an hent,
a oa du gant an naon ha diskrougnet o dent.
Epad ma tec'h 'r venec'h kuit
Brieg, sounn en e garr, a grozas: petra 'rit,
koz bleizi milliget? Kit d'an daoulin dioustu. »
Hag e sentas ar bleizi du.
Ne lezent ket avat
ar venec'h da dostaat.
Setu ma rankas an Eskob koz
Chom eno 'pad an noz.
Pa voe tarzet an deiz, ugent marc'heg pañan
a deue 'z a Vreiz-Veur da c'houlenn badeziant.
Ha pa daolas ar Zant an dour sakr war o zal
ar bleizi 'dec'has kuit raktal.

Paotr Treoure.



GWENAN SANT TENENAN

Eur beleg a Blabenneg,
 Dre wall heñchou lagennek,
 a gerze d'ar red,
 e-kreiz eun devez goañv,
 da welout eun den klañv
 war-nes kuitaat ar bed.
 Mont a rae, ar beleg santel,
 kuzet gantañ en e vantell,
 eun osti zakr 'vit ar c'hlañvour.
 Met koll a reas er poullou dour,
 en eun taol krenn,
 an osti wenn.
 Ha kaer en devoe klask ha klask a-hed an deiz,
 osti 'bet ne gavas nag a-zehou nag a-gleiz.
 Redek a ra neuze raktal
 da gér Gastell,
 ar gér zantel,
 gwasket e galon, du e dal.
 Ankeniet bras ha gwall nec'het,
 e kontas eno war an taol
 da eskob santel Kastell-Paol
 'pez a gemer 'vit eur pec'hed.
 « Deomp d'an daoulin, eme ar zant,
 ha pedomp start a greiz kalon,
 hor brec'h ganeomp savet er vann,
 ma ray Doue eur zell warnomp...
 E kreiz o fedenn,
 O, pebez souezenn!
 a-zioc'h penn sant Tenenan
 e c'hournij eun hed gwenan.
 Hag en e greiz
 ez eus war wel,
 o, va zud keiz!
 eur c'halur mel,
 douget gant al loenedigou
 war o eskelligou.
 Ar zant a grog er c'halur munut;
 ha petra 'wel
 e-kreiz ar mel?
 O burzud!
 An Osti zakr, an Osti wenn,
 bet en derc'hent kollet en hent,
 a oa eno souchet kempenn.
 Evel gwenan Sant Tenenan, bezomp bepred
 leun a zoujañs, a garantez, 'vit Mestr ar bed.

Laouenanig Breiz.

ISTOR BLEIZ SANT HERVE

Eun drugar eo, du-hont, gwelout hed an ero,
 an azen, ar manac'h, dindan an heol bero...
 Diwar dal Gwic'haran (1) e tizer ar c'houezenn,
 hag an azenig paour a zo gleb e groc'hen...
 Hogen er pellderig
 e tintas eur c'hloc'hig...
 Hop! eme Gwic'haran, mall eo din mont d'ar gêr,
 ha deoc'h-c'houi, va mourrig, mont da zec'hi ho ler...
 An azen disterniet a lez eur ruadenn,
 a stag da hinnoal, ha kerkenig warlerc'h
 e redas d'ar pradig da glask eun tamm merenn,
 ha da ruilha e gorf evit gounit e gerc'h...
 Ha graet gantañ e gorfadig
 edo bremañ gant e gouskig,
 pa ziredas evel eun daredenn
 eur mell bleiz, eur gwir spontadenn!
 'Dal ma wel an azen, astennet dibreder,
 e tispak e skilfou, e pleg e zivesker,
 hag e lamm gant imor war gein al loenig kêz,
 a glask en em zifenn ouz ar bleiz didruez.
 Ar gwad a red a-builh... Emañ ruz al leton,
 ha skilfou lemm ar bleiz a groge donoc'h-don...
 Gwic'haran a zired, 'dal ma klev ar stourmad:
 re ziwezat, siouaz!... Trumm oa bet ar c'hrogad.
 Hogen mouez Gwic'haran, douget gant an avel,
 a zeu betek Herve, daoulinet er japel:
 « Ar bleiz! ar bleiz! ar bleiz! Lazet hon azenig!
 Ar bleiz! ar bleiz! ar bleiz! Diwall mat, Herveig! »
 « Arabat dit sponta, va breurig Gwic'haran,
 a respontas Herve, 'dal ma voe dirazañ.
 Dre vadelez Doue, doñv e vo hor bleizig;
 el labour e tougo sternañ an azenig.
 Klask buan eur c'habestr,
 Ne vezo ket amjestr! »
 Evel ma komprenfe
 petra 'lavar Herve,
 — an dra-mañ n'eo ket gaou —
 ar bleiz a red d'ar c'hraou...
 Hag eno didrouzig
 e chomas ar bleizig,
 dispontik ha furik,
 e kichen eun oanig...
 Epad meur a vloavezh eo bet gwelet ar bleiz
 o vont da heul Herve, kouls en noz hag en deiz:
 gant an holl moumounet
 eurus en deus bevet.
 Pegwir e rank mervel an dud hag ar bleizi,
 mervel en deus ranket, lazet gant ar gozni.
 Met e vrud a bado,
 pellik c'hoaz, en hor bro:
 Keit ma vo mammou, keit ma vo bugale,
 e vo kontet e Breiz, istor bleiz sant Herve.

Saig ar Go.

(1) Gwic'haran a oa eun den yaouank o vev gant Sant Herve.

III. — KENSTRIVADEG AR C'HANAOUENNOU (CONCOURS DE CHANT)

Evit ar vugale.

An holl vugale o devo da gana pep hini diou ganaouenn:

- 1°) Ar baotred: « Pesk Sant Kaourintin », gant eur ganaouenn all.
- 2°) Ar mere'hed: « Sant Herve en e gavell », gant eur ganaouenn all.

An eil kanaouenn a c'hello beza n'eus fors pehini. Karout a rafemp klevet dreist-holl kanaouennou diwarbenn an anevaled. Ar re nebeuta anavezet eo a vo ar re wella.

Hag ar gwella kaner hag ar wella kanerez o devo da gana war ar c'hoariva, goude lein, dirak an holl.

PESK SANT KAOURINTIN

Ton: Kantikou toniet Eskobti Kemper

Son: Paotr Treoure.

p. 34: « D'ar Spered-Santel », pe eun ton all breizek.

I

P'edo Kaourintin ermit c'hoaz
e koajou Neved e Kerlaz,
ne veze morse gwall nec'het
na gant an naon na gant sec'hed.

II

Dour a gave, pezh a gare
'n eur feunteunig a zoare.
Ha bemdez bemdez en dour fresk
e kave kig eur pikol pesk.

III

Kaer en doa troc'ha tammou teo
ar pesk atao a jome beo.
Setu dizale 'z eas ar brud
eus ar burzud etouez an dud.

IV

Ar Roue Gralon hag e jao,
deut di d'ober eul libebao,
a gavas lipous ha saourus
kig ar pesk teo ha burzudus.


V

Raktal e kinniger d'ar Zant
koajou, douarou meur a gant,
hag her saver, a leverer,
da genta eskob Kemper.

SANT HERVE EN E GAVELL

Son: Saig ar Go.

Ton: Jozef Marreg.



1 — O bihanig, va bugelig,
gwisket he deus an noz
he c'haera mantellig:
mall eo mont da repoz,
e va moudounig! (2 wech)

2 — O bihanig, va bugelig,
ast eo al labousigou
e gwasked o bodig,
e kuz ar c'hoadigou,
o va moudounig! (2 w.)

3 — O bihanig, va bugelig,
war askel an huñvre,
gant an Ael, ho preurig,
nijit betek Doue,
o va moudounig! (2 w.)

4 — O Herveig, va bugelig,
kouskit, kouskit dinec'h,
rak war ho kavellig
Mammig a lez he brec'h,
o va moudounig! (2 w.)

IV. — KENSTRIVADEG AN TRESEREZ

(CONCOURS DE DESSINS)

Evit ar vugale.

Ijinit eur skeudenn livet a vo warni tra pe dra eus buhez unan pe unan eus hor Sent koz; ment ar paper-tresa: 27 x 21.

(Imaginez une image en couleurs représentant une scène de la vie d'un Saint breton, sur feuille de dessin de format 27 x 21.)

Kas al labourou, gant an ano, an ead hag ar chomlec'h (adresse), araok ar 15 a viz gouere, da: M. J. Le Brun, 35, rue Général-Leclerc, Saint-Pol-de-Léon (Finistère).



V. — KENSTRIVADEG AL LAZIOU-KANA

(CONCOURS DE CHORALES)

4 mouez disheñvel (4 voix mixtes): « Da zela Sant Breiz » (Komzou: Y.V. Perrot; kensonerez: G. Pondaven.)

3 mouez disheñvel (3 voix inégales): « Toutouig la la ». (Komzou: M. A. Abgrall; kensonerez: G. Pondaven.)

3 mouez kompes (3 voix égales): « Silvestrig ». (Diwar levr Jef Penven: « Tralalaleno », 150, rue Vercingétorix, Paris-XIV.)

2 vouez (2 voix): « Pedenn evit Breiz ». (Komzou: Y.-P. Kalloc'h; kensonerez: G. Pondaven.) Gwelit amañ warlerc'h.

Pep strollad kanerien o devo da gana unan eus ar peder ganaouenn-mañ, hag eur ganaouenn all a zibabint hervez o c'hoant. Karet a rafemp e ve skañv ha laouen an eil kanaouenn; ra vo kemeret toniou brezonek!

Goulenn ar c'hanaouennou kendoniet digant: M. L. Stéphan, directeur de l'école Saint-Blaise, Douarnenez (Finistère).

PEDENN EVIT BREIZ

Komzou: Y.-P. Kalloc'h.

Kendoniet gant G. Pondaven.

Daou gendoniadur a vezo kavet amañ: o daou emaint da veza kanet; pep laz-kana o ranno hervez e c'hoant war pozioù ar ganaouenn, daou boez war eur c'hendoniadur hag an tri boez all war egile.



Deut omp holl d'ho pedi, Jezuz, war hon daoul,
da glask en ho kalon konfort 'vit hon anken:
Jezuz c'houi hor c'hlev, c'houi hor gwel:
Ho pet truez ouz Breiz-Izel.

O ya! chomit ganimp! Hepdoc'h ne domp netra.
Hepdoc'h eur bobl a varv 'vel eur c'hori hep bara.
War ho kalon ma n'o-gouarnit,
da biou ez ay ar Vretoned?

Salver karantezus, d'an druez douget oc'h.
Ho pet soñj eus ar gwad hon eus skuilhet 'vidoc'h.
O Mestr, ho pet soñj ez omp bet
soudarded ho kroaz dre ar bed.

Ho pet soñj eus hor mez, eus hon trubuilhou holl!
Truez! Na lezit ket hor bro da vont da goll!
Ni ho ped, hon tal ouz an douar,
ouz hor c'hlemm na veit ket bouzar.

Ha c'houi, Tadou ar vro, c'houi Sent koz holl doujet,
p'emaomp skuiz el labour, d'hon harpa darnijit.
Roit dimp nerz e kreiz hon anken.
Gwarantit Breiz da virviken.

Imprimatur:
Kemper, 21 c'huevrer 1950,
J. CADOU, vikel-vras.

VI. — KENSTRIVADEG AR C'HANAOUENNOU POBLEK

Evit an nep a garo.

Bez' e vo gellet kana n'eus fors peseurt kanaouenn. Ar c'hanaouennou gwella a vo ar re n'int ket bet c'hoaz moulet.

VII. — KENSTRIVADEG AR GAERA RIMADELL (CONCOURS DU PLUS BEAU MONOLOGUE)

Evit paotred ha merc'hed yaouank.

Ar re a fell dezo dibuna eur rimadell brezonek er Bleun-Brug a gaso o ano hag ano ar rimadell araok fin mis gouere da: M. V. Séité, école Saint-Jean, Tréboul (Finistère).

Arabat e ve d'ar rimadell beza re hir.

VIII. — KENSTRIVADEG AN DISPLEGEREZ (CONCOURS D'ÉLOQUENCE)

Evit an holl dud yaouank, paotred ha merc'hed, eus 16 da 21 vloaz : studierien Ykamiz, Ykamezed, Skouted, ha tud yaouank all...

Danvez ar brezegenn da zevel :

« Meuleudi hor Zent koz. - Poueza war ar pinvidegeziou fiziet ennomp ganto : feiz, bro, yez ».

Ar brezegenn a die padout etre 8 ha 10 munutenn. - He rei a vezo ranket din-dan envor.

Prizioù da c'hounit :

Priz kenta evit ar baotred yaouank (Priz an Tad Maner) : eur perc'hirinaj e Rom epad ar bloaz santel (25.000 lur).

Priz kenta evit ar plac'hed yaouank (Priz Mari-Amice Picart) : eur perc'hirinaj e Rom ivez (25.000 lur)

An daou zen yaouank a c'hounezo ar prizioù-ze a c'hell mont da Rom gant perc'hirinaj Eskobti Kemper da viz here.

Tud o deus roet arc'hant dija evit sikour kinnig ar prizioù-ze. Renerezh ar Bleun-Brug, a c'houlenn digant holl vignoned ar Bleun-Brug, hag a fell dezo rei o zikour, kas o arc'hant da Visant Seite, Bleun-Brug, Tréboul (Finistère). — C. C. P. Nantes 544-22.

KANTIKOU

da veza kanet deiz gouel bras Bleun-Brug ar Zent e Kastell-Paol

A - PEDENN EVIT BREIZ (Gwelit er bajenn 19)

B - BREIZIZ, KOUEZOMP D'AN DAULIN

(Tennet eus levr Jef Penven : « Tralalaleno », e gwerz e ti ar BALB, Botte postale 108, Rennes. — Ar c'hantik a zo el levr-se gant diou vouez.)

Komzou : Y.-V. Perrot.

War don : « Lavaromp ar japeled ».
(Kantikou toniet Kemper, n° 71, p. 111.)

Breiziz, kouezomp d'am daoulin, hag hep fallgaloni,
pedomp Jezuz da gemer truez ouz hor bro-ni.
Breiz diskaret, eur piled nebeutoc'h a skedo!
War aodou ar c'hornaouog na teñval e vezo!

Breiziz, pedomp a galon, ma vo adsavet Breiz,
en he c'haer, evel gwechall, gant he yez hag he feiz.
Hep feiz kristen er broioù n'hell beza urz ebet.
Hep brezoneg kennebeut n'hell beza Breiz ebet.

Imprimatur :
Kemper, 21 c'hovevrer 1950,
J. CADIOU, vikel-vras.

KANTIKOU PROSESION VRAS AR GOULOU

PEDENN D'AR SEIZ SANT

War don : « Patronez dous ar Follgoad ».

Diskan :

O seiz sant a Vreiz Vihan, kaera bleunioù hor gouenn,
eus bar skedus an neñvou selaouit hor goulenn.
Levenez ha karantez, skuilhit war douar Breiz.
Mirit enni, kudennet, hor yez koz hag hor feiz.

1. War ho peziou burzudus, ebestel Breiz-Izel,
hon tudou koz anaoudek o deus, gant o c'hizel,
savet ilizou dispar, eo enno eun dudi
deoc'h selaou ar Vretoned diredet d'ho pedl.
2. E Breiz-Izel, en aner n'ho peus ket labourer,
an had kouezet eus ho torn, gwrizioù don o deus grêt.
Ha daoust d'an avel-ifern a zourc'honez e pep bro,
hor feiz a jom bepred start, evel hor gwez dero.
3. Ni fell e ve Breiz-Izel, evel m'ho peus hi grêt,
gant he feiz, he brezoneg, he gizioù koz bepred;
Ni fell bez' anavezet evit ho pugale,
hag en hent ganeoc'h merket, ni boanio da vale.
4. Keit ha m'he do Breiz-Izel ar mor glas da c'houriz,
o yez santel 'vo komzet ha karet gant Breiziz.
Ha d'he c'homz pa ehanint, 'vo nemet da c'hedal
he c'homz ganeoc'h da viken, pa vezint er bed all.

Imprimatur :
Kemper, 21 c'hovevrer 1950,
J. CADIOU, vikel-vras.

KANTIK SEIZ SANT BREIZ

War don: « D'hor Mamm, Santez Anna ».

Diskan:

O Seiz Sant glorius, klevit eus lein an neñv
ar bedenn a ra deoc'h Breiziz, ho pugale.

1. Gant grad vat hag enor, a bell zo hon tadou
o deus savet 'vidoc'h ar c'haera ilizou.
2. Grêt hoc'h eus labour mat, a-dreuz hon douarou:
ar feiz hoc'h eus roet dimp, taolet he deus gwrizioù.
3. Breiz 'zo deut eun douar goloet a vleuniou
a daol betek an neñv c'houez vat ar vertuziou.
4. 'Vit ma chomo bepred frouez santel ho labour,
o Patroned hor Breiz, dalc'hit mat d'hor zikour.
5. 'Vel hon tadou gwechall, ganeoc'h bet badeset,
ni vezo kalonek ha direbech bepred.
6. Ni 'venn rei sked d'hor bro, d'hor brezoneg, d'hor feiz,
beza eurus ganeoc'h er barados, eun deiz.

Imprimatur:

Kemper, 21 c'huevrer 1950,
J. CADIOU, vikel-vras.



Lennit bep miz « AR SONER »
kazetenn BODADEG AR SONERION,
e brezoneg hag e galleg. Kuzulioù d'ar
sonerien, tonioù nevez, kanaouennoù,
kuzulioù ha fentigeiloù a bep doare a
gavot ennan. Polig MONJARRET, ave-
nue de la gare, Carhaix, C.C.P. Nantes
1486-15. Ar skouerenn 35 lur; ar c'hou-
manant 480 lur.

AL LIAMM

kelaouenn lennegel

Un niverenn 80 pagenn bep daou viz

Koumanant evit 6 niverenn: 600 lur

Sekretour: P. LE BIHAN, 1, Avenue Marceau
TRAPPES (Seine-et-Oise) — C. C. P. 5349-06 Paris

Prenit
"Kannamb bugale"
gant "Mab er Hloher"

Levrig koant a zo ennan
60 son eus ar Morbihan
120 lur ar priz

Skriva: d'an Ao. Lohier
aluzenner — Lise — Pondi

KIRRI-TAN AR C'HREIZKÊR

LAGADEC - RIOU

SERVIJ AKETUS ETRE ROSGO HA BREST
BEAJOU - EUREJOU

KASTELL-PAOL

POUR vos REMORQUES pour TRACTEURS
et ESSIEUX AGRAIRES en tous Genres
Fabriqués en nos Ateliers

Adressez-vous à la Maison

LE JOLY & FILS

44, Rue du Pont-Neuf - SAINT-POL-DE-LÉON - Tél. 55

PNEUS NEUFS ET RÉPARATIONS

Augustin LAURENT
KASTELL-PAOL

A c'hell kas da beo lec'h:
Holl frouezou an douar - Frouez prim - Kaol bleunv
Artichaud - Ognon - Avalou-douar
(da hada kouls ha da zebri)
Kolo - Ludu

Tel. 134

POMMES de TERRE en GROS

Spécialités pour semences

CHOUX-FLEURS, ARTICHAUTS & FRUITS

Téléphone 2-33 (jour et nuit)

Boite Postale: 61

H. CAMBERLEIN & Cie

S. A. R. L. au capital de 200.000 francs
EXPÉDITEURS

SAINT-POL-DE-LÉON (Finistère)

Annexe: PAIMPOL - Téléphone 2-10

FORGE - CHARRONNAGE
MACHINES AGRICOLES

Jean-Marie RIOU

49-52, Rue du Pont-Neuf

SAINT-POL-DE-LÉON (Finistère)

CARROSSERIE EN TOUS GENRES


KOADACHOU EVIT AN TIEZ

ARREBEURIOU WAR C'HOULENN - ARREBEURIOU-SKOL

S. CELTON

23 ha 25, Straed Rozière - KASTELL-PAOL
Tel. 250

QUIMPER **FAIENCERIE HENRIOT** QUIMPER



TOUTES CARROSSERIES
INDUSTRIELLES & COMMERCIALES
"Métallique et Alliage Léger"

TUAL

TREDION
MORBIHAN

TÉLÉPHONE : 6

STAL LEVRIOU LE DAULT

16 Straed Ronan Madeg

- KEMPER -



Levriou brezonek, Gallek, ha skeudennou
RE GOZ, RE NEVEZ diwar-benn Breiz

Prenet e vez ho levriou (ha goloioù koz) diganeoc'h
Betek en ho ti ma c'houlennit.

ÉTABLISSEMENTS

Pierre CHANCERELLE

Conserves Alimentaires

(4 USINES EN BRETAGNE)

SIÈGE SOCIAL : QUIMPER

DÉCORATION, LITERIE, TISSUS D'AMEUBLEMENT

A. POUCH et Fils TAPISSIERS
DÉCORATEURS

17, Rue Sainte-Thérèse, QUIMPER — Téléphone 11-60

E ti **SOUFREREZ KERNE**

E. BEGOT

13, Straed Jean-Jaurès, KEMPER

Téléph. 9-33

E vez dreset adleuzet evit ar gweila goloioù kaoutchoug ar rodou
Gwerz a c'holoioù a bep ment — Labour vat, graet hep dale

ART SACRÉ
ORFÈVRE
BRONZES
STATUAIRE
CHASUBLERIE

Pierre PÊCHE

14, Boulevard de Kerguelen

QUIMPER (Finistère)

Téléphone 8-10

CABRAGE, CAPOTAGE, PATINAGE

SUPPRIMÉS PAR LA PREMIÈRE

REMORQUE AGRAIRE

adaptée en SEMI-PORTEE sur TOUS TRACTEURS — BASCULANTE sur trois côtés avec vérin
PRIX IMBATTABLES

BEVAN, constructeur, PAIMBEUF (Loire-Inf.) — Tél. 51

MOUSSEUX SUPÉRIEUR "V^{ve} AUBIN"

Gwin-Spoumek Dreist

E gwerz e ti an holl Varc'hadourien-Gwin
dre ar Vro a-bez

TECHNIC - RADIO

ÉTABLISSEMENTS MICHEL CARIOU

15, Rue J.-J. Rousseau - PONT L'ABBÉ

Toute la Radio

Téléphone 114

Chapellerie JEAN LE DREZEN

Rue Jean-Jacques Rousseau, PONT-L'ABBÉ

GANTS • CRAVATES • BAS • NOUVEAUTÉS

Dans un cadre agréable...

Une table de choix...

Une cave renommée...

Restaurant GIRAudeau

(BAR PARISIEN)

13, Rue Jean-Jaurès, QUIMPER

Brezonég en ti

